

## HISTOR ADMIRABL

## DEMEUS AR BOUDEDEO

*Pehini, abaoue maro hor Zalver, ne ra nemet  
bale nos ha deiz ac'hann da fin ar bed,  
abalamour d'an affrontiri an devoa bet en  
andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa  
voa o vont d'ar maro, a salvezas dezan dis-  
quisa var e stal, hac e teuas d'en rebuti exel  
eur scelerat.*

Var ton : *Guez Santez Anna.*

Asistantet enorabl, tostaat da gl'evet  
Ar vuez pitoyapla a voe biscoas er bed;  
An histor zo truezus demeus ar Boudedeo,  
A zo n'os - deiz o vale aboe hor Zalver maro.

Eus a dribu Nephtali, a gu'er Jerusalem,  
Voa ganet Absarius, carget a anathem;  
Dont a ras var ar bed-mà ea amzer Herodes,  
A felveas massacri Jesus, Mab ar Ver'ehez.

Va zad a voa eur o'halve, va mam qemenez,  
Hac a laboure en Templ da ober broderes;  
Ha va c'herent am desgas da lenn leor al Lezen,  
Hac hini ar Brofetet ivez a dra certen.

Goude e voen demeeet gant va c'herent anfin  
Da eur vreg fur ha prudant a dribu Benjamin,  
A binu'm boe tri bugel en amzer ma teuas  
Autrou Sant Yan Badezour d'annonç ar Messias.

Sant Yan a gountissas calz euz a bayanet  
Pere voa idolatret, caledet er pec'het :  
Dec mil den en un devez en deveus badeet  
Me, va gred. va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : Va fried emezi,  
Leqomp en em vadezi , enont è ar Messi;  
Ha me o respont dezi, gant eun ear direspët:  
Na ni nac hor bugale ne vimp qet badeet.

Aden eun nebeut goude S.Yan voe dibennet  
Dre urz'roue Herodes, eun den cruel meurbet,  
Ha ma teuas hor Zalver evit rën en e blaç ;  
Hac a ras dre ar c'hanton calz a viraclou bras

Clêvet e meus bet Jesus alies o sermon,  
Hep ne meuz bet profitet euz e bredication ;  
Va-unan e voan presant p'en d'oa rassaziet  
Dec mil den gant pemp bara ha goude ze pesqet

Me Boudedeo maleürus a velas c'hoa souden  
Jesus o ressuscita Lazar, breur Madalen,  
Ha güelet dibossedi calz a dud possedet,  
Ha sivoas din pec'her bras ne meus tam profitet

Aben eun nebeut goude voe Jesus qemeret  
Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,  
Ha condaonet gant Pilat da rancout da zougen  
Ar groas pouner ha mezus evit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, d'hor Zalver voe samet,  
Da vont da venez Calvar da vea crucifiet :  
O velet an dud o redec, me gemer va bugel  
H: me mont da dal an nôr pa yè en da vervel.

Cetu Jesus o tremen neuze abiou va zi,  
Pehini en tal va stal a deu da reposit,  
Ha me lavarat dean gant eur gomz arrogant :  
Qé alesse eus va stal, te zoe un den mechant.

Ganes on dizenoret gant da ifronteri,  
Pa qüelan o reposit aman e tal va zi:  
Qe alesse, den ingrat, eos sorcer milliget,  
Qe alesse d'ar maro, pa c'heus e meritet

Jesus a respontas din gant eur voez truezus :  
Mont a ran da bartia, den fall, den maleürus,  
Me reposito gant va Zad, te valeo bepret  
Dre bèvar c'horn e bed-mâ ac'han da fin ar bed.

Ia, te a valeo ac'han d'ar jujamant,  
Hac er c'hoste deo d'am Zad a velo suramant  
O varni ar bec'herien pere vo condaonet  
Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüstet.

Pa glêvis comzou Jesus, va c'halon voe touchet  
Ha me rêi va bugale en instant d'am pried,  
Ma velis ar Veronic o sec'hi bisach Jesus,  
Ha chom en he mouchouer e boltret truezus,

Hep ellout' n'em arrêti e heuillis hor Zalver,  
Hac e velis va Jesus ha calz gragez santel :  
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret  
Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staget.

P'am boe gûelet hor Zalver o vervel var ar groas.  
E creis etre an daou laer carget a boaniou bras,  
Ha me commanç va beach gant calz eus a angen,  
O tont da laret adieu da gar Jerusalem.

Sônjit eta, Bretonet pegement a c'hlac'har  
En deus ar Boudedeo brema var an douar!  
Rancout quïttat e gartier, e vreg, e vugale,  
Hep qimiadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoa haleet eun nombr a vlaveziou,  
Ec'h éruas en Ejypt, pel bras demeus e vrò,  
En e ma o ar Mor-Rus, elec'h m'oe tremenet,  
Moyses gant pobl Doue, hep cavout drouc ebet

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,  
Elec'h emedi en noas an dud a zo enni:  
Euo e velis eun tad o trec'hi a damou  
E verc'h evit sacrific da rèi d'o doenou.

Mont a ris da Malhodo, e pelec'h eus tud drol,  
Pere a a lor Doue hac an diaoulou oll;  
Pedi a reont Doue da gaout prosperite,  
Hac an diaoul a bedont ne rai qet drouc dèze.

Gûelet e meus er Japon ur vam meurbet cruel  
Pini' deuas da laza, sivoas, he daou bugel.  
Er vrò-ze è permettet laza ar bugale  
Pa n'o deus qet a vara da rèi dèze.

Goude' qemeris an hent da vont d'an Enezi,  
D'an Americ, d'an Azi, ha neuze d'an Tarqi:  
Ar gragez eus var vro-ze a vele d'an arme,  
Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da laza ar botret,  
Nemem unan dre famill na ve james miret.  
Bez'o deus eur rouanez a ro commandamant  
Da laza an oll botret, hep caout de nep damant.

Er gær eus a Garniol eus ur c'his drol meurbet  
Rac eno an dud yaouanc, pa vezont eureujet,  
E rânco ar vreg yaouanc, nôs qenta he heured,  
Mont da gousket gant ar prinç, vit bea enoret,

Bet on ebars eur c'hoad hanvet Cisaria,  
Elec'h ma eller bale cant lëo d'an nebeuta  
Hep cavet dour da eva, da feunteun na rivier,  
Ar pez zo goal incomod oll dud ar c'hartier.

Monet a ris c'hoas pelloc'h, d'ar gær a Vosopa  
Pini zo eus he divoal eur prinç eus an drola :  
Ur vanden chaç a merc'het en deus evit gardou,  
Ha n'en deus qen soudardet evit difen e vrò.

Ac'hane'yis da eur gær zo hanvet Estopet,  
Elec'h ma zeus serpantet ha loened vil meurbet  
Zo qer teo ha corf un den sur ma vent muzuret  
O deveus d'an nebeuta daou-ugent troatad het,

Er spaç demeus a gant vloas ez ou bet o vale,  
Ha me èruout adare em brò hac em c'hontre :  
Allas ! maro voa va greg coulz ha va bugale,  
Ha den ebet eus va brò certain n'am anavee.

Neuze e teuis da Rom, ebars en Itali,  
En amzer-ze e voa calz eus a c'hilac'har enni :  
Güelet'ris merzeria nombr bras a gristenien,  
En defot ue renoncent d'a feiz ha do lezen.

Me a vale var ar mor coulz ha var an douar  
Ha me partial neuze evit ar Franç, bro rar?  
E Marseill, Bourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon  
Ac'haue da Vreiz-Izel, d'ar gær vrao a Roazon

Guelet e meuz Montroulez ne voa nemet eur c'hoad,  
Ha gûelet Brest ha Qemper ebars en douar prat  
Ha gûelet ar gær a Is en e frosperite,  
Hac ar gær a Lexovi a meus gûelet ive.

Gûelet emeus Breiz-Izel en coad ha meneziou,  
Ma zoat evel sovajet neuze ebars er vrô;  
Me a vel calz a gærion er vrô-se batisset,  
A ra calz a chenchamant abaoe ma zon bet.

Me vel ar gær a Roazon eur gær gaer batisset  
Dol, Gûenet ha Sant Malo, Dinan hac au Naonet,  
Sant-Briec ha Landreguer, Lanion, Montroulez  
Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne ivez.

Ar c'hærion ze meus gûelet e coad hac en prajou  
Pa deuis d'ober va beach genta ebars er vrô;  
Cetu batisset Qemper, ha Brest he Recouvranc,  
Qemperle, Moelan, Kerahes ebars en assuranc.

Anfin, pa on condaonet gant Doue da vale,  
Me zo bet en em gavet e creis meur a arme;  
Canoliou a fusuliou, clezeyou, sabrennou,  
Netra ne dè bet capabl da rèi din ar maro,

Bet on ebars en listri a zo bet perisset,  
Hac an dud a voa enne a meus gûelet beuzet,  
Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouc ebet  
Comzoum Doue a rânco bea accomplisset.

Condaonet e zon gantà da chom var an douar ;  
Comprenit oll christenien, emà zo din glac'har !  
Va zourmanchou er bed-mà biqen na èchuo  
Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp goennec so em godel bepret,  
James gant nep seurt clenvet me ne dont attaget,  
Bet on ebars en broyou elec'h m'oa ar voenn,  
Hep na zeus staget ouzin na clenvet nac anqen  
Va boutou na na va dillat james na uzont qet,  
Dre bermission Doue a meus bet offancet ;  
Peder guech e meus redet pèvar corn ar bed-ma  
Ha guelet e meus ive calz chenchamant enná

Bremà e zon comancet da redec ar bempet,  
Hep ne don ambarasset gant dibri na cousqet ;  
Güelet a meus bet broyou zo bet oll revinet,  
Ha calz demeus a gæriou gant ar gurun dèvet.

Ne meus qet calz amzer evit chom da barlant,  
Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardant  
Nan, ne zeus nemet Doue a elfe disclèria  
Ar boaniou bras a souffran qerqent ma reposan.

Pebes maleur è din-me bea bet rebutet  
Demeus a gichen va stal Jesus Salver ar bed  
Pa voa o vont d'ar maro, da zont da zisquiza  
Ha me neuze dre valc' a zeuas d'e zispriza.

Emà ê ar maleur bras a meus var ar bed-ma?  
E mon atao o vale ouspen trivac'h cant vla,  
Ha c'hoas e ranqan bale ac'ban da fin ar bed.  
Pedit Doue evidon, ma zin d'ar joaüstet,

FIN.

